


Tud fidel, a wir galon,
 O velet ho foaniou,
 Sicourñ hor mission,
 Savit deomp ilizou :
 Digassit ar scól gristen
 Deomp ha d'hor bugale :
 Ni bedo evit goulen
 Varnoc'h bennoz Doue.

Breudeur, etc.

Ha c'hui, Escop binniguel, (1)
 Ganet e Breiz-Izel,
 Gant ar maro discaret
 E creiz ar broiou-pell,
 Euz ar Barados pedit
 'Vit Breuriez ar Feiz,
 Digant Mari goutennit
 Ma cresco c'hoaz e Breiz.

Breudeur, etc.



(1) An Aoutrou PELLERIN, Escop-Biblos, guinidic
 eus a Guemper.

8N3-4-026

CANTIC

EVIT

BREURIEZ AR FEIZ.

Ton : *Santes Mari, Mam Doue....*; pe : *Ton kelven.*

*Tud ar Broiou-pell o c'houlen sicour
 Breuriez ar Feiz.*

C'hui peñe zo christenien,
 Ha na glevit-hu ket
 Eur c'hri zo leun a anken
 Euz pevar c'horn ar bed :
 Selaouit oll hor peden,
 Hor clemou truezus,
 Selaouit petra c'houlen
 Ho preudeur malheüruz.

DISKAN, *ha respount Breiziz,*

Breudeur, ni glev ho clemou
 Euz an tu all d'ar mor;
 D'ho mouez ha d'hoc'h ezomou
 Hor c'halon zo digor,
 Ni a rofo aluzen
 Evit sicour ho pro,
 Ni a zavo beleyen
 Ha deoc'h ni ho c'hasso.

Christenien a Vreiz-Izel,
 Ho pet treez ouzomp,
 Ar joatisted eternel,
 An Env a c'houlennomp :
 Rac ni zo var an douar
 Tud paour hag emzivad,
 N'anavezomp, c'hui her goar,
 Na Jesus, nag he Dad.

Breudeur, *etc.*

Gueich-all, pell eus sclerijen,
 Pell eus Lezen Doue,
 Er memes tevalijen
 Ho pro a oa ive :
 Mil bennoz d'an Ebestel
 Ho deuz ho kelennet,
 Grit kement all, christenien,
 Breman en hon andret.

Breudeur, *etc.*

C'hui breman zo evuruz
 P'oc'h euz ar sclerijen
 Eus ar feiz ker precius,
 — Ho pro a zo christen —
 Mes ar sclerijen gaër-ze
 Alfe disparissa,
 Ma na zeu ar garante
 En ho touez d'he maga.

Breudeur, *etc.*

M'an deuz Jesus promettel
 Ne ancounac'hao ket
 Eur verennad dour roët
 D'ho preur en he zec'het,

Petra dalvo, christenien,
 Ar guennec binniguët
 Gant pini da virviken
 Eneou vo prenet.

Breudeur, *etc.*

Ah ! Doue da reiñ calon,
 Nerz d'ar Missioner,
 Joa ha consolation
 En he boan ha miser !
 Deoc'h ive bennoz Doue,
 Deoc'hu-oll, christenien,
 A raf gant guir volonte
 Ho quennec d'her souten !

Breudeur, *etc.*

Deut eta, belec yaouanc,
 Quittaït bro, mam ha tad,
 Daoust d'an daëlou puill ha stanc
 A scuill ho taoulagad,
 Deut, *Saeou-du Breiz-Izel*,
 Hast hon euz d'ho clevet
 O prezeg an Aviel
 E bro ar bayanel.

Breudeur, *etc.*

E fleuren ho yaouanctis
 Cals aman renk mervel,
 Mes ho ene a c'houniz
 Ar vuez eternel ;
 Roudou ho zreid binniguët
 Chom merket en hon bro :
 Ra zeuio c'hoaz bretoned,
 Calz c'hoaz henvel outo !

Breudeur, *etc.*